

## F. I ( ?):Kanaouenn Laou Druilleg

N'am-eus na ti, na kerent,  
N'am-euz mignon ebed !  
Re all o-deus pezh a garent,  
Me 'ya da glask va boued !  
Va godell a zo goullou,  
Daou wenneg 'm-eus hepken,  
Mez an heol sklêr en oablo',  
'Zo din war v a hredenn.

Ne glaskan ket ar madou  
Nag ar hloar nag ar vrud !  
Me 'zoñj an oll enoriou  
A vez aliez pud !  
Dihoant on ha dizourisi  
Mez me 'm-eus koulskoude  
Hentchou Europ hag Azi  
Da bourmen va danve'.

Daou wenneg 'zo em godell  
'M-eus bet en aluzenn.  
Ne vanko ket din skoazell,  
Me 'oar tapoud va den !  
Daou wenneg ! Setu va stal !  
Komañs't int d'am devi.  
Ganto me 'ya da gestal  
Eur bannah "eau de vie".

Goude, mar gallan flemma  
Eur wrahih koz bennag,  
Me 'breno eun tamm bara  
Rag ma hov a zo gwag !  
Goude, mar gallan krignad  
Daou wenneg all arre...  
Me 'oar eun draig 'zo mad :  
Eun tamm kig da greisteiz !

Evidon war an douar  
N'eus ket a nehamant,  
N'am-eus ket ezomm a hloar  
Aour nag arhant !  
Mez eun deiz Laou Druilleg

E-barz ar Baradoz  
'Kichenn an oll halloudeg  
'Vo laket da repoz !

Eun nizvez sul yen skornet  
Da zeg eur, rik-ha-rik,  
'N eur foz ema bet kavet  
Laou Druilleg maro-mik.  
'N e hodell eur horn-butun  
Hag eur pezh daou wenneg...  
Eno 'oa e oll fortun...  
Ar paour-kêz Laou Druilleg.